

PERAK SEVEL GWE?

Neb lak eur blantenn en douar
Dek kwennek leve 'n euz, hep mar.

Pa diskaro e ween fô,
Mad ha kapital a gavo;

Pa diskaro e we peupli,
E kavo kemend-all ha mui.

Ha derv ha kistin ha gwe-all
D'e hererien (1) na vont ket fall.

Prena leve hep skarza 'r ialc'h,
Gret ze 'ta mar-d-oc'h fur a-walc'h.

Tan en oaled 'pad ar gouarn,
Ha disheoladen 'n kreiz an hanv.

Glazur an delio da renoz
Ho taoulagad pa vefet koz.

'Touez ar branko 'n envedigo
O kana d'ec'h kanaouenno.

Kivich ha kraoun, kistin daro ;
Plantet ive gwe avalo.

Ar jist-aval a dalv boed
Wel 'vit gwin ru ar C'hallaoued ;

Da laouenaat e galon,
E galon vad d'ar gwir-Vreton.

J. B.

(1) « Héritiers » en gallek.